

**Yannig Fur** (Kerdudo Kleger 1864 – An Alre 1924)  
Beleg.  
E gwenedeg. Modernnaet eo bet an doare-skriva.

## Me Mestréz

### I

Er gérig-se, ‘tre deu vané<sup>1</sup>,  
‘Tu-men d’er marhad-lé<sup>2</sup>  
Inont<sup>3</sup>, tostig d’er stér  
En un tiig distér,  
Inont, koant el ur rouanez  
E vager me mestréz.

### II

Braùig ha fur hé beg  
Bougennue ru’ ha c’hweg,  
Ha deulagad glaz én hé fenn,  
Gwiù el ur stérédenn.

### III

Ha pe ya d’er feton<sup>4</sup>,  
Berù e hra me halon ;  
M’he héli<sup>5</sup>, mès pell ha kuhet,  
Ged eun<sup>6</sup> a voud gwelet.

### IV

De heul geti ‘yeen,  
Doh ti e kaozhen,  
El ma oen pe mehé ur sell  
Ha moueh en durhunel.

### V

He fod e zo karget,  
D’er gêr ‘ma distroet ;  
Ha me glask hoah ‘barh er feton  
Gweled he skeud en don<sup>7</sup>.

### VI

Didan ur bod spern-gwenn,  
‘M-eus kelvet ur sonenn :  
« Karein e ret, ‘mé en estig  
Nag euruz oh, Yannig. »

---

<sup>1</sup> ‘tre deu vané : etre daou venez.

<sup>2</sup> marhad-lé ; leur ar marhad.

<sup>3</sup> Inont : Eno.

<sup>4</sup> feton : fetan (feunteun).

<sup>5</sup> héli : heuill.

<sup>6</sup> eun : aon.

<sup>7</sup> don : deun.

## VII

« Taùet, eutru an Ein<sup>8</sup>,  
C'hwi 'hra goap, ha pas kin<sup>9</sup> :  
Me halon e zo ankinet,  
Me 'gar, n'on ket karet. »

## VIII

Ar 'r barr, er poker-koed<sup>10</sup>  
E lar én ur hoarhed :  
« Hineh ne ket eid gober lez  
E spont 'raog e vestréz.

---

<sup>8</sup> Ein : Even.

<sup>9</sup> kin : ken.

<sup>10</sup> poker-koed : pil-koad, kazeg-koad.